

- 205 -

Dastumad Pennwern: dornskrid 89

80. AR SKAFF NEVE

(follennoù 243 - 245)

Ar skaff neve deus a Henvik
E street malheur var dorfet.

E vond d'an od da vizina
N'deus gred eur malheur ar vrassa.

Pem varnugent e voant embarket
Pemzek a woazet, deg a verc'het
Dober bizin dar Villaouet.

ooo

Ar Guillou koz a lavare
De vab Fransez eun deis a voe :

- Va mab Fransès, chomit er ger
Rag goël rust bras e an amzer

Chenchet en deus a roud an avel.

- Bezet an amzer evel ma garo
Ni ell d'an od, bizin eur^o vo. ° Komp. moarvat:
sur

Ne voaint ked arruet gant an Taro
Na deus deut da c'houc'h^o deze ar maro. ° Komp.:
c'hwec'h

Ne voant ked arruet gant ar Vale
Pa e deut da c'houc'h^o d'he adare ° Komp.:
c'hwec'h

- O Itron Gwerc'hes Varia
Or chikourit, beuzi a ra.

Sant Karantek var bord an od,
Mar plich geneoc'h or sikourot.

Ne voaint ket arruet gant Plouzorno
Ma troas ar vag var he gino.

Kriz e viche ar galon na voëlje
E bord an od an eb a vije,

- 206 -

O woëlet ar mor e vervi
Gant ar kristenien e veuzi.

Kriz e vije ar galon na voëlche
Er bord an od neb a viche

E voëllet trivac'h korff a den
A zindan parkou Keriven.

En Santez Maharit int liannet.

Neuze int karget en pem kar
Da kass da Henvik d'an douar.

Kris e viche ar galon na voëlche
en Santez Maharid an neb a viche

O klevet ar Guillou koz o voëlla
Deus e bugale o kimmiada.

Ne kave den er gonsole
Nemert eur beleg iaouank a Dole :

- Tavit, Guillou koz, na voelit ket
Eur mab' all er ger ganeoc'h zo chomet.

- Va mab Jakès a zo beuzet,
Va mab Ian a va mab Fransèz

A neuze va merc'h Louisa,
Muia tra a garen er bed ma.

- Va offern genta, pa selebrin
Evito eo e leverin.

vvvvvv

Louisa Herviou, 6 fevr. 1851

vvvvvvvvvvvv